

Dizano : Diviz. Modernnaet eo bet an doare-skriva. Skrid bet savet e fin an XIX^{ved} kantved.

Martez e oa bet savet gand Proux.

Diviz etre eur hliant yaouank hag eur riskerez koz

War don : *Paotred Plouillo.*

Ar paotr

Livirit din, moereb Kato, bet ez oh koant gwechall¹ ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon kêz, koantiri ‘zo eun dra fall ;
Koulskoude e oan plah terrubl, degajet, krohennet kaer,
Va lañchenn distagellet, va lagad lemm ha seder.

Ar paotr

Livirit din, moereb Kato, bet ho-peus servijerien ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon kêz, rag n’houll ket ar veleien ;
Koulskoude ne oan ket skornet, plijoud a ree din Pipi,
Ha pa frote eur plah all e santen ‘vel jalouzi.

Ar paotr

Livirit din, moereb Kato, tenerraet ‘n-eus ho kalon ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon ker, rag ar pèch am-oa aon.
Koulskoude eur zulvez pardon e houllas ker brao ouzin
Rei dezañ eun toullad pokou ma oa red din asantin².

Ar paotr

Livirit din, moereb Kato, ‘oant ket pokou penn-da-benn ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon ker, n’avanturis va hrohenn ;
Koulskoude eun nozvez bennag ma oan o prezeg dezañ
E prezegas ker brao ivez ken a riskis, a gredan.

Ar paotr

Livirit din, moereb Kato, risket ho-peus c’hoaz goude ?

¹ bet ez oh koant gwechall : koant ez oh bet gwechall.

² asantin : asanti (evid ar rim).

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon ker, nemed an noz valeüruz-se ;
Koulskoude, 'vid lavared gwir, aliez pa zivunen
E vijen meurbed souezet o kaoud Pipi em barlenn.

Ar paotr

Livirit din, moereb Kato, riska 'rafeh c'hoaz brema' ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz³, va mignon ker, gwell 've ganin perisa ;
Koulskoude mar ve red absolu⁴ ober se d'e zoulaji,
N'e-me ket asur ar galon da zoned d'e refuzi.

Ar paotr

Livirit din, moereb Kato, dre an hent-se 'h eer d'an Neñv ?

Ar plah

O ! nann, biken, va mignon ker, ne gavfeh ken reiz hag eñ.

Ar paotr

Ho trugarez, moereb Kato, ho kelenn nan'eo ket fall,
Ha koulskoude 'vid en em zalvi, me 'gemero eun hent all.

³ biskoaz : biken (a vefe gwelloh).

⁴ absolu : ger galleg brezonekaet.